

ROUANEZ MA C'HALON

DISKAN :

*C'houi eo rouanez ma c'halon,
Balamour ma zoc'h koant a mignon.
Evit ho kaout me rafe ar bed,
An heol, ar loar, ag ar stered.*

1

Dirazoc'h mon estonet,
Neur vuel pegent kaër guenet
En deus roët deoc'h an natur
Vit ho eurveded drazur.

2

Henvel deus eur lapousik,
A ve tisken goustadik
Deus an envou guis eun ael
Var behini bar ma zel.

3

Pe henvel deus eur bouket
Ros, heon neve digoret.
Ho splendeur, evel dezan,
Neus ket e bar er bed man.

4

Kaeroch out e guiriones,
Evit ar braoua perles ;
Evidon ken ravissant,
Evel ma an aour brillant.

5

Eun tenzor ken precius
Hel rent ahanon eirus.
Var va spered nos a de
Ema o himaj pare.

6

Ho kavout e ran ker koant,
Vel meus kals diezamant
Gant aon ma teufen do kol.
Guel ve dign kol ar bed ol !

7

An esperans guemer plas.
Kredi ran lar a viskoas
Va bue vo kurunet
Ganeoch mo kement karet !

François BENOIT.